

Page Bretonne  
Salud da Vrezelerien Breiz

Salud, Brezelerien, paotred hor Breiz-Izel,  
A zalc'h soun ho panniel e tan ar brezel!  
A-dreuz ar reuz euzus bepred ar Vretoned  
A stourm evit ar Frans evel leoned.  
Soudard war droad, war varc'h, evel reder ar  
[mor,

En-dro d'ho tal e lufre eur c'helc'h a enor.  
Salud, brezelerien, paotred Breiz-Izel,  
A zalc'h soun ho panniel e tan ar brezel!

Dre-holl, 'hed an'talben, ho kaver c'houi, Breiziz,  
Gwazed n'int ket boazet da zont war o c'hiz.  
Kouls e difenn Verdun hag en assaith ar Somm

N'eus ket par d'eoc'h da rei d'ar Voched kaout  
[tomm;

Er rusta tachennou, pa vez spontus ar c'hrog,  
Piou nemet ar Vreiziz a vez en a raok!  
Salud, Brezelerien, paotred Breiz-Izel,  
A zalc'h soun ho panniel e tan ar brezel!

Salud, rejimanchou Kemper, Brest, an Naoned,  
Re Wengamp, Sant-Brieg, Roazon ha Gwened!  
Siouaz, war an dachen, en draonien, roz pe koad,  
Breiziz, priou oar ped gwech e ruihas ho  
[kwad!

Anhou dir ar Brezel start en deus bet fate'het...  
Startoc'h ouz ar bleizi ho peus bet dalc'het!  
Salud Brezelerien, paotred Breiz-Izel,  
A zalc'h soun ho panniel e tan ar brezel!

Situl d'eoc'h-c'houi, dreist-holl, a zo kouezet  
[du hont,  
Gwazed e kreiz ho prud, tud yaouank dispart!  
E peoc'h ra ziskuizo ho korfou paour maro!  
Warnoc'h eo e savo kaeroc'h eost ar Vro.

Ha diouz ho Paradoz goulennit ouz ar Mestr  
Ma ffastrimp ar Voched, ma vimp digabestr!  
Salud Anaon keiz, soudarded Breiz Izel,  
Kouezet 'vit ho panniel e tan ar brezel!  
Eostig Kérinek.

TRADUCTION

Salut aux guerriers de Bretagne

Salut, guerriers, fils de notre Basse-Bretagne.  
— Qui gardez ferme notre drapeau, au feu de  
la guerre! — A travers le fracas toujours ter-  
rible les Bretons luttent pour la France comme  
des lions.

398

U. A.  
22-7-17